

# VICTORIOU

Goneet gant ar Francichen var ar Russianet, abaone mis Kuen-  
golo 1854 betec han 30 a vis Mai 1855.

Var ton : *Adieu, Pontreco*

Selaouit, pobl a Vreiz-Izel,  
Ar recit caër ha guirion,  
Eus a victoriou ar brezel,  
Goneet gant hon nation,  
Tadou, inamou, deut da glevet  
Kelou deus o pugale  
A zo deus ar gær partiet  
Evit souten an arme.

Nao mis a zo e mon bemde  
O scriva fidelament  
Ar c'hélou a ve, deus Crime,  
Roet d'ar gouarnament  
Evel doc'h me a meus kerkent  
En faç d'ar Russianet ;  
Ha va c'ha'on a drio kerkent  
Ma ve eur gombat roet.

Pa voe Odessa bombardet  
Bremen zo pevarzec mis  
E renkas ar Russianet  
Redek buan var o c'his ;  
Evel eur vandennat goëdon  
Spontet gant eur c'hi chace  
E yejont d'en em foudra don  
En eun doul deus o c'hontre.

An toul bras se a zo eur gær  
Sebastopol he hanvet  
Savet en touesk ar reyer,  
En peb tu fortifié  
Mæs, eb c'hoit aon gant e arme,  
Ar marechal Sant-Arnaud  
A yas var ho lerc'h en Crime,  
Evit o ziboul eb faut.

Neuze ho breudeur zoudardet,  
Gant bevanc ha canolliou,  
Var douar ar Russianet  
O peus savet tantennou  
Eb ranc'ont den d'ho chaceal ;  
Kerkent arme ar Zozon  
E erruas, dre eun end all  
Ar memes position.

D'an aontek a vis guengolo  
Hon arme a vel, gant joa,  
Russianet campet er vro  
Var dorguen rivier Alma,  
Pevar ha daou ugent mil den  
A ziskuel dei gant coler  
E ze resolvet da zifen  
Ar passach eus ar rivier.

An de valerc'h, var dro kreiz de,  
Hon arme, hac ar Zozon,  
Gant Turkianet deut ive  
Gant seiz pe eiz bataillon,  
A deus da lakat ar spont  
En creis an adversourien,  
En eur red k'kuit e leschjont  
Pemp mil den var an dachen.

Funnec deves just goude ze,  
Hon arme vi torius  
E deus goneet adarre  
Meur a gombat glorius !  
Forcet e deus ar villajen,  
(*Lukermann* e he hanvet)  
Deg mil Russian en dachen  
Dindanni a zo c'ueet.

Kerkent e red, ep arreti,  
Betec kær Sebastopol,  
Hac e commanc lakat enni  
Ar pourron hac an horrol ;  
Mæs, an adversour, en devoa  
Recevet cals a droupou  
Evit krenvat ho goernissa  
Ar gær hac e rampariou

Prudant e voa neuze lezel  
An adversourien frankil,  
Ken a mijenp allet sevel  
M'guerieu cre hac util  
Evit lakat or zoudardet  
En abri deus ar vitrail  
A dole ar Russianet  
Pad an nosispical.

Gant ar vaillantis ar vrassa  
Ne vije aliet biken  
Combatti, na ober netra  
Da goll'ant an adversourien  
O c'hant mil den, evel unan.  
A vije, gant o skeulioù ;  
Diskaret er forchou buan  
Gant mitrail ar c'haolliou.

Ractal evit obeissa  
D'ar general Canroder,  
E commancer da vatissa  
Ties eneb an amzer  
Souden, en eur bioc'h stard,  
Ec'h avanças al labour,  
Betek ma c'helas peb soudard  
Telua var e adversour.

Ar gouan zo cri a yen bras  
En bro ar Russianet ;  
Ar c'hlenvet a greskas siouas !  
Souffraçon ar Zoudardet.  
Mæs er Franç an oll famillou,  
En f'yeur o bugale  
A reas cals a zuezoannou  
Da dud vaillant ar C'hrime.

Ouspen daou villion arc'bant  
A zo evite savet ;  
Tapisson tom, ha guin ardant  
A zo c'hoas deze casset  
Peb ini, ervez e voyen,  
E stad, e gondition,  
Zo deut calomnec da zouten  
Bugale an nation.

Eun nosves an dri varn'ugent  
A vis c'hoerver, da zeg heur,  
Canrobert a ro da intent  
D'he zoudardet hor breudeur  
Penos e ronkout attacki  
Ha distroja morailloù  
Batisset gant an erimi  
Eu tu deo d'hor liennou.

Daou vataillon a zouavet  
Eus an eilvet regiment,  
Eus ar marin eun a'l zo ed  
Gant eur general vaillant  
D'n em deli var al labour  
O doa urz da zistruja ;  
Racket en deus an adversour  
Coll cals a dud a plega.

En nosves se diou vatiment,  
*Al Léopard, ar Fulton,*  
En eur villajen important  
O deus lakat ar spouron ;  
En eur dostat o deus forcet  
Ar c'hozaket da redec,  
Deg canon o deus kemeret  
Ha kirri ouспен c'huezec.

D'ar zul, trivac'h eus a vis meurs  
E commanc c'hoas on arme  
En comb jou da gemer peurs  
Gant ar Zozon adarre,  
Mæs, pa tell d'ar Russianet  
Dont en nos d'ho attacki  
Dre vaillantis hor zoudardet  
Int forcet da reculi,

D'an dri varn'ugent, d'ar guener  
Var dro deg p' eunnec' heur,  
Dre ma voa tefal an amzer  
Al loar bihan dre valeur  
E coüzas douzec' bataillon  
D-meus ar Russianet  
Gant cals a gri hac a spourob  
Var eun dornal zouavet.

Ne voa ket ingal ar basti ;  
Mæs ractal ar Francichen  
Corf a c' rfa goumanç cregi  
Ebars en adversourien ;  
Gant cross o fuzul hac gan mein  
Pa n'ellient ober guelloc'h  
E tollent aoc' var o c'hein,  
Hac e c'havacent larec'h.

Mæs, ar general Antemarre  
Kerkent a zo direde-t  
Gant e zion regimant leger,  
Ar zeiz-t hac an eizvet ;  
Neuze an adersour ractal  
Gant da u vil zoudard a goñl  
En deus ranket klenk antreal  
Er gar a S. bastopol

Betec an unan ha fr gont  
Deus a vis meurs divea,  
Ar prinç bras Russian a gont  
En deveus collet dija  
D'oc' c'haut anter cant mit dent just,  
Abaoc' bla d'ar poent man ;  
Goult ac'h ne pegeu rust  
E meump tretet anan.

D'ar zul fask, eiz a vis ebrel,  
Da zeg heur eus ar mitin,  
Et ten or zoudard-t filel  
Et c'hamp d'an ofiç divin  
Evit goulen ners a zecour  
Eus d'ue ar c'homb jou  
Da vez trec'h d'han adversour  
Ha da c'honit victorion

An de varlec'h var dro teir heur  
Da c'houl n de. Canobert  
A roas eb dale nemeur,  
Urzon da voubardi kar  
Ar c'hanollion euzet en dro  
Da vurañ Sébastopol  
A veler neuze dizolo  
Prest da c'hoari eur goal rol.

Ar houliji hac ar vitrail  
A dol partout ar mæro ;  
D'eur vagazin l poult ractal  
O deus gred lampad eno  
Mil Russian, en de kenta,  
O deus collet o bue ;  
Sébastopol a gren dija  
Dirac canol hon arme.

C'hoec'h mil tol canol varn'ugent  
B' m te zeganti tennet  
Evit franket maoc'h an ent  
Var zu ar Russianet.  
Ar spourob hac an desper  
So en creis an inant,  
Ea skei rust meueus a ranker  
Vit en laket da varchi.

Ar batimanchou, eus ar rad,  
Evit souten an trouppou,  
En nos a deus da destat  
Etrezec a murailhou,  
H' neuze, pep mi d'e dro  
A loskent eur vordeen,  
En eur fila kuit divar dro  
Portehou an adversourien.

Ar Russianet o doa gred  
Murailhou cren hac ho-t  
Evit ne mijemp ket allat  
Rei c'hoas de eur goal guentel,  
Mæs ni a zo lenn hor lagad  
A plom en hor fuzulion,  
Hac eu pen e zom potret vad  
A eneb ar c'hanollion

D'ar c'henta deveus a vis mai,  
Ha zeg heur demens an nos  
E zomp bet ed, eb ober fe,  
D' d'ro n'li en o repos  
Ar Russianet kousket mad  
Gut fignç en o armou,  
Hic zomp ed d'ho raskeilat  
Evel ar vulgigou.

Dstrujet e bet al la'bour  
Gred gant ar Russianet ;  
Ar c'henta vai, d'un adversour  
E meump eur guentel roet  
An de varlec'h en deus esseet  
Gonit adarre var'omp  
Ar pes en doa varnam tapet  
Ha dstrujet etre-s-omp.

Goude an divei victor  
Goneet gant hon nation,  
Canrobert a deu gant benor  
Da rei e z-emission  
Eus comandamant an arme ;  
Ar general Pelissier  
A zo bet hanvet e c'houde  
Abeurs hon Impalaër.

D'an daou varn'ugent a vis mai  
Erves ma verk Pelissier  
En deus roet adarre de  
Eur guden da zizoher,  
C'hoec'h mil Russian zo chomet  
A-tennet var an dachen,  
Hac ar rest a zo bet spontet  
Gant arme ar Francichen

An de varlec'h, evel dija,  
E ze chemmet goal draakil  
Adrens neuveou Tchernaïa,  
Eh dont gant e er subtil  
Da essa tapout d'ho arme  
A oes en deveus collet ;  
A hanvel n'en a'zom gal ket ere  
Pa n'en de k-t d'istroet.

Ha'ar seiz varn'ugent e Kertch  
Gouls hac e Leviskale  
E roas hor zoudardet kerc'h  
D'ar Russian adarre  
Kerkent a m'an deveus guetel  
Hon arme oc'h erruont  
D'ra-si en deveus ranket  
Redec evel eur fitout.

Laket en deus, en eur vont kuit  
Lap'at e vagazinou,  
E ganollion, n' deuz dstrujet,  
Devet e vatimanchou,  
Anterkant lestr a zo chemmet  
Varlec'h ar Prinç Gortschakoff,  
Ha batimanchou a'het  
Zo mistri ar mor d'Azoff.

D'oc' c'hant deg mil en en Crime  
A zo entre Francichen,  
Turkianet, Zoz n'ive  
Egyptanet ouспен  
Ar Piemont nemeus dija,  
En deveus, var ar bienen,  
Gant ar general Marmora,  
Fournisset pémzec mil deo,

E meump o c'hortos, de ha de,  
Ma vo demp'oll'annoncet  
Penos e ze gant hon arme  
Sébastopol kemeret.  
Ar victor zo en eum laket  
An servich ar Francichen  
Evit ma vezo dstrujet  
Arme an adversourien

Epad an no mis passeet,  
D-meus a zeiz amiral  
D deus ar Russianet,  
Peup so bed-lizet ractal,  
An Impalaër Nicolas  
Daoust d'he-ll autorite  
En deus ive ranket, hallas !  
Peris-a dirac Doue.

Pedomp eus a greis hor c'halon  
Maestr an en hac an douar  
Da gonservi d'hou nation  
Ar gallout ac ar victoar,  
Souden e meump an esperanç  
Da vriet ar Vretonet  
Gant al lore eus ar vaillanç  
En ty o zud retornet,

Propriété de l'Éditeur,

P. DERRIEN.

Lannion, librairie veuve Le Goffic.